

- 49 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

## 102. GWERS SANTEZ KRISTINA

( follennoù 41-46 )

Nobl a parlant a c'hoas e voa iaouank  
er bed man en e ezamant  
gant ar madou e deus dastumet  
a goude se e bed tourmentet.

Santez Kristina a lavar :  
Retournet bed var an douar  
Da ober piniñ garo  
ag a sepad o dilivro

Pa voa e c'horf dan illis kasset  
Da enterri gant peb respet  
e brezans ar kompagnunez vras  
savet deus an archet e lavaras :

- Me ne moa ket a arretamant  
Me voa breman; ma miche c'hoant,  
Karget a joa er baradoz  
gant ar gwerc'hez e repos.

Pa voa va enne partiet  
gant eun ell e voan kasset  
da vellet eur plass du a teval  
Karget a boaniou ag a c'hlac'har.

Pa moa goëlet ar poaniou cri  
a kalz deuz va anaoudigez  
e goulenniz ag an ivern e voe  
digant ancell an c'hasse

- O saïlokras, eme an ell,  
ar purgator eo a wellit.  
Deus da vellet an ivern breman  
Differans e poaniou ar re man

Incontinent e voant kasset  
Da vellet an ivern miliget  
Ne oa deod den var an douar  
Na flerie deus eur sort gonnar

- 50 -

Fa moa goelet ar poaniou kri  
 ag a neuze ar poaniou diremet  
 Dirag Doue e voan kasset  
 Tridal a ren doc'h e vellet.

- Ma merc'h vad, eme va Doue,  
 Va parados a zo dide  
 a c'heus breman meritet mad  
 gant ar goec'hezec ag an euvrou mad.

A beurs ar burgator out deuet  
 Allas! kalz a hineou poaniet!  
 Goul a reont soulajamant  
 A den dezou nen deus tamant.

Mar kerez retorn e bue  
 Dober pinijen evit-he  
 Me roio dide nerz a sikour mad  
 Da boan a vezo paed mad.

Ker buhan santez Kristina  
 a lavaras adieu d'ar bed-man,  
 dar pehet a dar beherien  
 a da komans ar pinijen.

Var an douar na alle ket  
 chom e-kichen peher ebed  
 a diabel hi a sante  
 ar stad donjerus a neze.

Dre ar vertu deus a Zoue  
 e begou ar gouez e pigne  
 e begou an touriou uella  
 Gant ar pevar avel da foeta.

Aliez e save en noz  
 pa veze an tud all o repos  
 Da ruillal a da froalcho  
 Dre an n'encho louz a garo.

Fa vije an douar skornet,  
 frimet an douar kaledet  
 e save en noz  
 da c'helvel ar chass de sago°

°kompr. :  
 d'he zaga

- 51 -

Pa vije kroget a dispenet  
 Gant ar chass en noaz beo  
 en eun kave iar<sup>o</sup> ker buhen  
 Mes Doue a faille dezan.

°kompren : iac'h

Pa tremene er vilinou  
 e ie er poulrod avichou  
 er vilin en kreiz an daou ven  
 evid mala e gorf pendaben.

Mond a re er bichou aliez  
 en touez an dud varo  
 evid kaout ar fler  
 ag ar c'houez a nezo.

Pa vele ar goter e vervi  
 e ene a viche, diouti  
 hag en eum tolle ebars war he fen  
 evid paredi kig a krohen.

eur veach e zud gati nec'het  
 e chonjal e voa diskiantet  
 e lekejont anezi en eur prison sekred  
 eb rei dezi tam na bane  
 Keit ma voa er prison-se.

Mes dre viraklou, alliez, a(1)lez  
 a savaz en divron ar santez  
 gant pini a neum vage  
 Keit a ma voa er prison-se.

Pa voa dilivret ahane  
 Dispinet er bursud er giz-se  
 e neur dollas e kreiz an tan  
 er fornijou da kaout poan.

E kreiz ar marhat, da kreiz an de  
 Deuz ar potans e neum krouge  
 A gant al laeron e veze  
 eun daou pe tri devez e chome

- 52 -

A ne de ket poaniou ar re man  
Ma na zeus bet biskoas var ar bet man  
A re ar bed a beurs doue  
da zilivra an anaont-se.

-----  
A ne devoa ken okazion  
nemet truez deuz an anaon  
Pedomp evit-o kallonek  
evel ma karen e ve gret.

evidomp on unan  
pa vo red mond dar poaniou da vellet.

vvvvvvvvvvvv

Jannton Charlès, 10 févr. 1851

vvvvvvvvvvvv